

DISPUT

ENTRE

Yan an Tregueriad a Loïs ar C'hernevad



TON CHARMANT

C'hui oll dud divertissant, c'hui pere garr kana,
Deut da glevet cun disput, a mar plich d'er prena,
Un disput ag a so bet tre daout boitr delicat,
Entre Yan an Tregueriad, a Loïs ar C'hernevad.

Yan an Tregueriad oa ett d'ar foar d'ar Kerhaes,
A Loïs ar C'hernevad vez heno aliez,
Neur gavet oant asables en hôtel da leina,
Daou sen karguet a speret a tud a beadra.

Goudé ma devoa leinet, digaset ar c'hafé,
So bet savet eun disput kiriuz entrezhe,
Neur drinka gant ar c'hafé e digare farsal,
Eo bet savet an disput raktal ebars er zall.

AN TREGUERIAD

Iec'het mad diide Loïs, da greg, da pugale,
C'hui a so oll bourc'hisien breman koste Kerne,
Allas nimp a so kontroll duman koste Treguer,
Nimp a zo bemde et vaga dimezel ar vizer.

E Kerne so douar mad, douar lann a prajou,
Douar koat euz ar c'henta, kalz a wez avalou,
C'hui a peut gist da eva da derri ho sec'het,
Nimp rank gwelc'hi hor c'halon gant gist ar gleskeret.

AR C'HERNEVAD

Me a sonj din breman Yan e digare farsal,
Peus c'hoant rei din da gredi an holen neo ket soll,
Me a so sur Tregueris, eveldomp e Kerne,
A ra gant a bep seurt kig iveau ho melerje.

Neus ket un den er bed-man bet an oll dalanchou,
E pep korn demeus ar Frans so bep sort douarou,
E Kerne so douar mad, kenkouls vel e Treguer,
Tud a voar o b a ba, laket liou var baper.

Evitout da veza Yan, a beza Tregueriad,
A me do veza Loïs, a beza Kernevad.
Me a barlanto ganet, ar feson ma kari,
A gwella potr alies a c'hone ar barti.

AN TREGUERIAD

Nep a gredfe a c'hanout a lavarfe Loïs.
Neus ket a dud en Treguer a seurt da Guernevis,
Evit beza lien stoup e hoher da zillad,
Eur C'herne a zo dister e tall un Tregueriad.

A Jakes a liou moguet eo da vreur yaouanka,
Guillemet ar Gouillouren neuze da c'hoar goza,
Un a seurt se e Treguer a vez mad e peb ty,
Kasset a vefe d'ar park da sponta ar brini.

Jakes so un anter tok ganthan cholo e benn,
Da lakad en dro d'e c'houk, neus ket eur gravaten,
Guillemet a zo kolet he mouchouar ganthi,
Pe e defot a arc'hant neus bet james hini.

AR C'HERNEVAD

Tregueris a so zotoc'h vit ar Guernevarned,
Nimp a deu da nemp c'huiska e gwir baysantet,
Nimp a zoug aour ag arc'hant, neur vont dre an henichou,
Tregueris vez aliez ep fons ho godellou.

Rag c'hui a zo oll karguet a c'hloar ag a bompou,
Aliez vez var ho chouk ganech o holl vadou,
Ag o mest neuze, Yan baour, n'oc'h ket evit pea,
Dre an hurcher vez gwerzet deoc'h ho tillad kaera.

Pa vo gwerzet da vadou, te ranko mont goude,
Da gastel kaer ar skiant da frita paourente,
Bars he amzer dremenel, te sonjo aliez,
Pa ne po ket da zebri na bara na krampwes.

AN TREGUERIAD

C'hoant a peus laret. Loïs, breman Guernevardet,
O deus madou markisien, pe madou baronet,
Goude tha ma oc'h paour raz, al liou so n'ho kerc'hen.
Deuz an dougerien astu pe deus pillauerien.

Ne peut nemet kiri kavel, Loïs, koste Kerne,
Ar seurt se vez e Treguer c'hoari gant bugale,
Na da staga diouthe met daou ijen treud-treud,
Ag eur c'hoz varc'h divoar yoan, sec'h vel enn tam keunut.

Nimp a meump kezek pouner ag a so lard a kre,
Kiri var o lerc'h, kapabl da souten bro Guerne,

Ma welfez te a reze e vont gant an hentchou,
Chomset souezet, Loïs, digor frank da c'hinou.

AR C'HERNEVAD

Me a c'houll bea krouquet, var ma fe a Loïs,
Mar so kezek e Treguer ar seut Kernevad,
C'hui a pet kezek ken lourd divoar vel ribotou,
So eur vez gwelet anhe var an hentchou.

Nimp a mem kezek a rass, evit an aotrone,
Vit redek er c'honkouriou, a vez e pep kontre,
A beteg ugaent mil liour vez gwerzet pep hini.
Biskoas ar seurt se, sur Yan, neus bet he ferchisi.

Me a meus c'hwech' ijen vad, a daou varc'h ar gwella,
Da staga var va c'har, Yan, so kapabl da dreigna,
Da garr bras a da guezec'h, da oll grizollonou,
A zous a dre da Guerne a drecuz dre ar parkou.

AN TREGUERIAD

C'hui ne peut na Iwenet mad, nag ed bars e Kerne,
C'hui a deu da n'em c'hreuxi tougaën an didalve,
C'hui na rit nemet kousnket, zutella a kana,
Pe beza kichen an tann, fumi deus o koaza.

Me a vez a gorf rochet er park o labourat,
A trempa mad va douar, a dre ze me eost mad,
Kemet a ed me hep blos, ebars em douarou,
Da leunia kambr a grinal ken a bleug a freustou.

AR C'HERNEVAD

O ! la met te, Yannik kes, so eun den ep skiant.
He gass da esst a gargou vit neaheit a arc'haut,
A ne pe ket eur c'hreunen, pell oraog fin maë,
An ed pe gwerzet araog a brenas ker goude.

Me ne ne rankan james, Yan, gwerza greunen abet,
Gant arc'hant an oc'hen kras ar mezt a vez paet,
Me a meus kerc'h a gwinis, zegal d'ober bara,
Gwinis du d'ober krampwez pad ar kenta pemp blos.

Da c'hok te vez er c'hrignal, kana a vez huel,
Al loget gant ar famin vez forzet da verval,
Evitout da lavaret, tougam an didanve,
Me a voar denc'het bara d'am greg, d'am bugale,

AN TREGUERIAD

Gweloc'h eo ganin keza barnet d'ar galioù,
Vit bea bars e Kerne, beteg fin ya deiou.

E Kerne so menajou ken lous a ken dister,
Tiez nin ket mad d'ober krevier moc'h e Treguer.

Me meus eur soll, eun doll rond, kals a gadoriou kaer,
Kement entren bars ein zall, ho c'halon vez zeder,
Servijet a vez dezhe da zebri, da eva.
Ar pez zezir o c'halon, demeus an treo gwella.

C'hui ne peut met bleut zegal, Loïs, d'ober bara,
Me meuz duman eur c'hi bras, zepfe ket anezhan,
Krampwez fall a galettez, patatez peilla tout,
C'hui zo gros ho pouzellou a frank toul ho kouzouk.

AR C'HERNEVAD

Te a zo karguet da dy, Yan, gant lorc'hachou,
Souden e teufont er maes, a lamp dreist a treujou;
Eus an dol rond bars he zall e vagas koustansik,
Hennez ra buan eur paoura, eus un den pinvidik.

Me ne meus ket un dol rond, nag eur zall bars em zy,
Na biskoas neus bet manket bara din da zebri,
Pa n'eur gav ebars em zy eur mignon da vale,
Neuz da zebri da eva, hervez he volonte.

Beza neus kig a bara, gist, gwin a gwin ardent,
A goude ar c'hafe du pez blîch d'ar paysant,
A te, Yan, euzan dol rond, ma debras kals frikou.
Pe labour mont da blega neur dont gant an hentchou.

AN TREGUERIAD

Kernevis so deut er bed eus rass kornandonet,
Pe Doue neus e gole varnoc'h, Loïs, taolet.
Eur c'herne d'uguent vloas, neo ket mad e Treguer,
Da gass ar saout da beuri na d'ho digass d'ar gaer.

E Treguer a zo paotret a zo nerzus meurbet.
Kapabl int da renta fass, memeus da herculet,
Un Tregueriad e koler dolfe eus Breiz-Izel,
Eur C'herne gant un taol dorn, pemp kant leo da vervel.

AR C'HERNEVAD

Ne rentas ket testini, Yan, demeus ar justis,
Pa deuas da veprise evel se, Chernevis,
Kernevis so potred stard ouspen lijer a droad,
Biskoas Tregueriad neus bet evit eur C'hernevad.

C'hui Tregueris, sioas dec'h, so gwell lourd ho memprou,
A neus ket eur berad goad bars en o koaziou,
Goude vez glao o kweza, Kernevis a rafe
Fwen buan gant Tregueris var lein menez Are.

AN TREGUERIAD

Te a ra kals a pompon. Loïs, gant da botret,
Goude ta ma in dister kenkouls a da verc'het,
la ! E Kerne so merc'het ag a so ken dister,
Diou anhe n'int ket kapabl d'ober un Treguer.

Me meus peder plac'h yaouank ag o deus kalite,
Biskoas ar seurt se neus bet ganet bars e Kerne,
A re ze a so teo a lard, a ru o c'hlipenonu,
Ar botret glask ar seurt se evit ober mamou.

AR C'HERNEVAD

Araog ma vo fin d'ar foar e Kerhaes, hirie,
Te vo laket souezet Yan, gant merc'het Kerne,
pa vo re ze o danzal eus son ar binniou,
E labourfont o zalou just eus an notennou.

Korfet brao a merc'het skanv, ken koant a ken lijer,
A seurt se a rafe mez da flakennou Treguer,
A so evel berniou teill bars en assambleou,
Poan o deve o fival da chans plas d'ho boutou.

AN TREGUERIAD


Ret eo dem breman, Loïs, finissa an disput,
Me ia da brena eur marc'h, ar foar so en he brud,
Te so kontant en Kerne, a me zo en Treguer,
Kemeromp ar pouz kafe, vel daou vignon sinser.

AR C'HERNEVAD

A wir galon reketan, digant Doue dit Yan,
Chans a bonheur er bed man evel din va hunan,
E pep leac'h pa neur gafomp nimp vo kamaradet,
Gras demp goude hor maro, da vont d'ar Joausted.

Propriété de l'auteur et tous droits réservés.

LE BRUN.



AVENTURIOU

Daou den yaouank deus a ganton Callac

Ar plac'h marvet gant ran galon

TON ANAVEZET.

Ma mijé bet ar furnez, an nevoa Salomon,
Ag eur speret da rima vel ar gwir Ciceron, (!!!)
A talanchou Josue, Moysez a Cesar,
Moa compostet eur chanson a so leun a c'hlac'har.

Moa compostet eur chanson, scrivet gant ma daerou,
Var sujet eur bromesse toret gant gwell deodou,
Ken vit avans davantaj, fel din n'em adressi,
Da roue ar firmamant so hanvet ar Messy.

Breman eta, va Jesuz, va Salver souveren,
Me o ped a wir galon d'exausi ma feden,
Astennit var ma fluen, ho torn madelezus,
Evit ma ellin^f skriva va bue malevrus.

Kenta moa bet^t an honor da yelet va mestres,
Oa d'an daouzek a viz mae, e pardon Sant-Serves,
Eur c'houlaouen en he dorn bars er prosision,
Charmi rez ma santimant, ag ive va c'halon.

Neur don d'he c'honsideri, va c'halon a dride,
Vel ma reont en envou ar sent hac an ~~jelez~~,
A me o yonet neuze, gante karante sinser,
Da saludi anezhi, dre gomzou saluter.

Me ho salud plac'h yaouank, rouanez ar guenet,
Chui rentfe din en enor a ne veritan ket.
D'an tren n'ho compagnuez, me meus desir ardant,
Mar deot breman d'am refuz c'hui am graï languissant.

Hii a respontas dime ebars e ber gomzou :
Me ne non ket deut aman da vale honoriou,
Da roula ma yaouankis ; me so deut, den yaouank,
Da heuill ho compagnuez, me so meurbel contant.

Neuze nimp e vont hon daou, dre eur gwir garante,
Gant plijadur assambles, da sevel amilie,
Laket e moam hor speret da formi eur chaden,
Vit beza victorius var hon enebourien.

Bars an amour mutuel, nimp oa antreet,
Dre artifisou Venus hor chaden a mamp gret,
Hor c'harante a greske da heuil hor secrejou,
Mes an amzer breskrivet, rez fin d'hor prepojou.

Araog dont da guidadi an eil eus eguile,
Me o c'houlen digant'hi eur merk a amitie,
Ag hi o lavaret din, va servijer fidel,
Cetu aze eus va dorn eur mouchouar godei.

A so fleuriet gant amour, bordet gant amitie,
Model deus va flijadur, test deus va c'harante,
Neuze retorniz d'ar gaer gant eur galon gontant,
Pa oa ganin em godei mouchouar va douz coant.

Tremen a ren an amzer, gant amour o veva,
E sonjal em c'harante, Marie Augustina,

Dre ma neus ket er bed man prinsez na rouanes,
Da gaout an talanchou vel ma neus va mestres.

Ag he bisach so henvel eus un aël ar c'haera,
Ag e c'horf so imach demeus ar re vrava.
Oll astrou ar firmamant a loar ag ar steret,
A golfe o sklerijen, ma vefe kurunet.

Eur bloavez omp bet om daou ober amouroustet,
Neuze lakechomp un termem da veza unisset,
Da wel Marie anter eost, lakechomp hor santimant,
Da vont dirag ar Vere'hez, da ober hor sermonat.

Ebars en ilis l'ulat, eur plas ar sintella,
Kemerit vit testini hor mam an teuera,
En neur antren en ilis skouechomp d'an daoulin,
Vit ober hor promese dirag hor mam divin.

Ille dornic flour em hini, unanet hor c'halonou,
Gant gwir garante d'an env svet hor pedenou,
Nit goulen digant Marie grasou particulier,
A digant Roue ar gloar hor mest ag hor Salver.

Pa moamp gret hor promesse nimp o tonet er maëz,
Ag hor c'halonou laouen karget a levezenez,
Henvel demeus kaot vel lakel n'ho liberte.
Goude beza exilet, entro pad ho bue.

Hi neuze a laras din, breman va servijer,
Eo poent demnin kimiadi, a mont ive d'ar gaer,
Evit anons d'hor c'herent penaos meump esperaus,
Da antrenn en union, a d'ober aliens.

O ! Pa oan e kiniadi an eil ous egile,
Sonjemp digant hor c'herent, kavet hor liberte,
Mes tromplet omp bet sioas e n'hon frefantion,
Roet deus bet demp pikou, da piket hor c'halon.

Pa oan ebars em gwele e kemer ma repos,
Me o klevet un eostik var dro anter nos,
Pehini lavare din ken faril dre he iëz.
Da vestres o deu yaouank, bars e tristidigez,

Evit klevet an eostik ne moa ket ar greden,
Mije eur groas ken pouner er bed man da zouguen,
Coulscoude hones, a oa ma flaneden galet,
Lennet diume eus an env, dre he iëz al lapousset.

Neuze oan bet o veva, ia epad tri devez,
Gant glac'har bras a chagrin e sonjal em mestress,
Ne oant ket evit repos na debri nag eva,
Ken a mijé bet gwelet Marie Augustina.

Goude me vont de gwelet, d'an termen asinet,
A pa welis anezhi me oa ol glac'haret,
An daelou n'he daoulagat he moues anter troc'het,
Ag hi vel un den maro a bet en he archet.

Allas gant an tourmanchou he speret oa troublet,
He bisach gant ar glac'haret oa meurbet dislivet.
He c'halon a oa mantret dre nerz an ankeniou,
Ma teuas da laret din beuzet en he daerou.

Jean gaës, va muia karet, ranet kant eo va c'halon,
Boe meus klevet va setans, va c'hondaonation,
Anoncet din gant va zad cruel a dinatur,
Mui a zeleou ar gwel deod, evit e grouadur.

Dre gomzou malisius a zellou diremet,
Neus laret din birviken ne vijen uniset,
Pa n'ellan o possedi, aman var an douar,
E finiso va bue, bremen gant ar glac'haret.

Cri a vije ar galon a chomje ep gwela,
Ebars en beret Bulat, de zul ar rosera,
E welet va mestrezik, teplori var ar be,
Lec'h ma oa he zadou koz bet galvet gant Doue.

Allas, kals bras a zaerou a deus eno scuillet,
Ar pinsin var be he zud, a deus bet remplisset,
Bars en traonien Josaphat devez ar jujamant,
Vo ket muioc'h a c'hlac'haret, n'ag a zaerou sanglant.

Vit a oa ganemp om daou, eno e kimiadi,
Ebars e beret Bulat rankout nem separi,
Ar goad en hor gouziet a so deut da frima,
Ag or c'halonou tener a so deut da ranna.

Ben pemzek devez goude, e klevis ar c'helou,
Penaos e oa va mestrez var gwele ar maro,
Pronons a rez va hano e neur guital ar bed,
Neur laret kenavo Jean, e Pales an Drindet.

Pa eo maro va mestres, va dous, va c'harante,
Me ielo d'eun ermitach, betek fin va bue,
Eno me raï pinijen betek fin va deou,
Esperout c'hoas et gwelet, e pales ar joajou.

(propriété de l'auteur)

LE BRUN, Louis.



Montroulez, e ty CHEVALIER, mouler.